

- 1 -

Breiziz, va henvroiz karet,  
Hirio, siwaz, me a zo koz,  
Med, na ped gwech em-eus sonet  
Da zansal en deiz hag en noz.  
Ha mar plij gand Santez Anna,  
E klevot hoz war an dachenn  
Son skiltruz va bombard velen  
O lakad tud va Breiz da drida.

Diskan

Me eo Matilin an Dall,  
Ar bombarder laouen,  
A lak an dud da zansal  
Diwar va barrikenn:  
Eun taol sut ha souden  
Pactrea skarz d'an abadenn,  
Eur lomm stuan ha raktal  
Pactred a fringal, gé!

- 2 -

Yaouank e kollis ar gweled,  
An eostig, ma lavarer mad,  
A gan flourruch en e gaoued  
Pa vez dallet e zaoulagad.  
An dall a gêrig Kemperle,  
En e lochenn war ribl an dour,  
Evel an eostig a zon flour  
Etre an Izol hag an Elle.

- 6 -

Kalz a vije bet pinvidig,  
Ha ganen-me ne jom netra,  
Nemed ijin va bombardig  
Da hounid va zammig bara;

-3-

Yannig ar Chapel, em hichen,  
A c'hoari gand e viniou  
Dreistoll pa zun bord e werenn  
Evid souplâd e vuzellou;  
Nag heñ a sko, Yann va homper,  
Gand e zonerezig lirzin,  
Ha d'e heul pa sko Matilin,  
Eo marz gweled penaoz e fringer.

- 4 -

Bet on e Pariz, eun devez,  
O seni dirag ar roue;  
hag heñ, koulz ha tud e balez,  
Gand ar blijadur a c'hoarze,  
A c'hoarze kreñv, a c'hoarze pell,  
Heb gelloud mired da c'hoarzin,  
O klevet an dall Matilin  
O tistaga toniou Breiz-Izel.

- 5 -

Malo-Korret a Gêraez,  
Kenta grenadour a Vro-Hall,  
Fellas dezañ klevet ivez  
Sonerez Matelin an Dall;  
A dost, a bell e tireded  
Da weled patrom ar zoudard  
Ha da glevet mouez va bombard  
O kana enor d'ar Vretoned.

Mez a-ze pikol forz ne ran,  
Me zono keit ha ma vevin  
Ha deiz va maro ne gollin  
Nemed va bombard ha va diskan.

Yann KERE

.....

G W I R V R E T O N E D

I. O va Breiz, gand da douriou brudet,  
Da vor glaz ha da veneziou,  
Da vrug ruz ha da lann alaouret,  
Te zo koant dreist an oll vroiou!

(Diskan:)

Gwir Vretoned, tud a galon, war-zao!  
Da gana gloar da Vreiz or Bro,  
Ha da ziwall tenzor he yaouankiz:  
Ar Yez, ar peoh hag ar frankiz.

bis War-zao! War zao! Da gana 'bouez-penn:  
Breiz da virviken! Breiz da virviken!

N'ez euz ket, 'vel e-touez or herreg,  
A dud vad, seder ha nerzuz;  
N'ez euz ket, 'vel en or brezoneg,  
Soniou drant, gwerziou dudiu!

3. On tud koz, tud leal ha santel,  
Stard evel on dero kaled,  
A ouezas miroud da Vreiz-Izel  
He brud vad, he nerz, he hened.

4. Bretoned, savom or halonou,  
Ha touom e talhim atao  
Da vale war roudou on tadou  
Keit ha ma 'z ay ar bed endro!

KANAOUENNOU BREZONEG: goulenn roll al  
leoriou Kanaouennoù digand EMGLEO BREIZ, B.P.17, Brest.

Pactr Treoure